

Kanouen nevez war sujet ar Votadek

War ton : *Kimiad ar zoudart yaouank pe Fanch koz*

Pe war ton : *Ar falz Bromesse*

1

Setu bed ar votadek, ar bobl a neuz komzet
An Even ag ar markiz, war ar reng zo chomet
A breman vo goueed, an heiz deuz a viz Maë
Pini deuz an daou otro, a vezo depute

2

Bepred an otro Soisbault, deuz a ger Lanhuon
Kerkoulz an otro Even, zo vel dec'h daou vignon
An eil kever egile, deuz diskwelet dim sklaer
A renko zur ar markiz, paka e stal en-berr

3

O pa ew digweed, da Even derc'hel penn
An otro Soisbault vitan, a nim holl a vandenn
Na wit c'haessa mar galomp, douari ar markiz
Vel breudeur e labourfomp Even c'heñ da Bariz

4

Deuz ar Republikanet, zo muioc'h barz er vro
Goneed deuz 'spenn mil mouez, war markiz Rozambo
An eil gwech e vongn krenvoc'h vo ket stard ar brezel
Ag Even vo depute, kanomp a vouez Huel

5

Aroch mont da c'had voti, me o ped mignonet
Na d'ober eur zel gâro, dan amzer tremened
Gwechall barz en Breiz-Izel, an holl dud oa paour dû
En dro man zo chanchamant, aboé ren an tu rû.

6

Ar labourerien douar, a deuz dalc'hett sonj mad
Kerkoulz an dud a vicher, tud ari barz en noad,
O na pegen braz kernez, wa er vro da c'houlse,
Dalc'h mad war an dud dister, pa rene ar roue.

7

An amzer a ren breman, man zur mad ar c'hontrel,
Rag an holl zo pinvidik, war douar Breiz-Izel.
Kalz c'hanomp 'gerz en gwertur, lod all en bicyclett,
Beteg ar gemenerrien, koulz potred a merc'hett.

8

Ar markiz a neuz c'huchett, meur a wech barz er gam
Ma renje evel gwechall, ar roue newe flam,
Red eo ma ve diodet, pe kolled e skiant
Benn laret a sort komzo, na dar gouwarnamant.

9

Ar Republik so o ren, boe daou ugent vloa so,
Kalz krenvoc'h e ew breman wit n'amzer on zado.

Petra a dalvez dimeump, ôber brezel deizi
Aboe c'homp war an douar, meump gwelet nemeti.

10

O ia dan dewejerien, na grass d'ar Republik
Ez ew bed kresket o faë, despet dar pinvidik,
Holl a meump en bro gaer Franz skolio mad a gwirion
A gant eun tam diskamant ve muioc'h a galon.

11

Meump ket gwelet ar markiz, aboe pewar bloa-so,
Mez breman eo dispaket, en meur a baroujo,
Na wit c'haessa adarre, gant e gomzo flemuz
Wit tapout c'hoaz on moejo, ez ew deud deuz guez.

12

Kavout reio an otro, en kalz a baroujo,
Gwel-dud ve goneed, ben ar votadego.
Bepred dan dud pinvidik, sklapo arc'hant ag aour,
Ia velse neuz goneed, ar markiz Roz-ar-baour.

13

Breman dezan ni laro, bepred huel on penn
Na nomp ket ken da woerza, en bloto moc'h a grenn
Nag ewit aour na arc'hant, potred stard nim vezo,
Dar gwir Republikanet, e rofomp on moejo

14

En dro-man larfomp dezan, dic'haned ma mignon
C'hoant meump da vea renet, ia gant eur gwir vreton
Kar en omp bro Breiz-Izel, zo c'hoaz tud talvoudek
Ag a gomz iez on zado, c'hep mez ar brezonek,

15

An otro Even vo zur, e wit an dud a boan
Ag a rei e holl bossup da souten 're vian
Ia mar keromp en dro-man, nim reio labour vad
A kasfomp da depute, Even ar C'houarc'had.

16

War zav-ta potred ma bro, mar karomp bean krenv
Derc'hel da c'heuil ar progrès, nan biken war a drenv
Neuze nim a lugerno, zeder dirag ar bobl
Beomp Republikaned, dan traou keement so nobl.

TAD AR WIRIONE.

Aux urnes citoyens
Votons pour Pierre Even
Chantons plus haut
Et que nos voix terrassent Rosambo.

R de tout Républicain

lire et de propager

on Républicain »

GUINGAMP ET DE TRÉGUIER

Républicaine Laïque et Sociale



PLUS DE FAIBLESSE NERVEUSE

Gratuite

A TOUS lecteurs.

ÉNIE VAINCUE FORCÉ

annaire en suivant ce pointillé.

Veillez signaler la cause de l'affection : surmenage, excès, chagrins, fatigue, soucis, maladie, hérédité, etc. Depuis combien de temps souffrez-vous ?

La langue est-elle blanche ?

Designez vos points douloureux : tête, poitrine, dos, reins, estomac, etc.

Souffrez-vous de

Form with horizontal lines for writing answers to the questionnaire.

TREILLAGES (brevetés S. G. D. G.)

GRILLAGES, RONCES, POTEAUX, BARRIÈRES et toutes clôtures économiques simples ou combinées

Systeme PEIGNON, Ing^r Const^r

FABRICANT breveté S. G. D. G. (France et Etranger) Modèles déposés DOULON-lès-NANTES (Loire-Inf^{re})

Dépôt à GUINGAMP, 18, rue de Traouzac'h

Les Clôtures Peignon sont reconnues les meilleures et les moins chères contre maraudeurs, gibiers, bestiaux, etc. Se font infranchissables, rustiques, légères ou décoratives.

IMPRIMERIE

du " Clairon Républicain "

37, Place du Centre, Guingamp

IMPRESSIONS POUR LE COMMERCE